

*Kantvedoù sioul o doa treset bedoù divent  
e pep brochenn goad*

*Lan Tangi*

### *1. Girzhier tro-war-dro deomp*

Diwar ar bern patatez er c'hriagnol e huchen a-bouez-penn war gement ton d'an neb a venne selaou :

— Gant patatez Jili 'vez maget tud an ti ! Patatez Jili a zo tout... disi.

Jili eo va zad, ha d'ar poent ma'z aen bep abardaez d'ar c'hriagnol da c'hoari, e kaven eno ul lod eus sklêrijenn va buhez pemdez.

Bras e oa al leurgêr dirak an ti e Kerango. “Ur plas kaer gwechall evit an dornadeg,” a lâre Treñvor an amezeg tostañ, e zaoulagad o parañ 'trezek n'ouzon ket pelec'h. An ti-annez tre e-kreiz, chomajoù bras war e dro. Hini an tu kleiz a veze kaset ennañ ar saout prest da halañ, al leueoù bihan a veze kraouiet eno ivez 'pad un heurtadig. A-us d'ar c'hraou e oa foenn. En tu-hont d'al leur e veze goroet ar saout en ur c'harr-ti bras bet savet gant ma zud. Harp ouzh an ti, diouzh an tu all, ur chomaj strishoc'h hag uheloc'h un tamm. Gant Jili e veze renket eno an ostilhoù evit an traktor, ar bidoniadoù eoul hag

a bep seurt binviji bihan. Druz ha du e oa kazimant pep tra tro-war-dro gant an eoul kozh. Ne oa ken nemet ar mogerioù mein a oa livet e gwenn gant raz ha da vont d'an nec'h un tamm skalier sonn ha diskempenn. Kreñv e oa ar solioù ha tev pleñch al leur er c'hriñgol rak eno e veze ledet an ed. Dre ar prenestr kreiz e tezougemp ar greun d'an nec'h : gant ma zud e oa bet prenet ur viñs en ur gorzenn da aesaat al labour. E fin miz Eost ez aemp alies, ma breur Lan ha me, da sankañ hon treid diarc'hen betek hor c'hof-gar er bern sec'h kras, frond skañv o sevel anezhañ. Herlinket ha meret hor c'hroc'hen dindan hon treid.

Evidon e oa ar chomaj-se hag e c'hriñgol, en goudor, harp ouzh tor Park an Nec'h takad kaerañ ar feurm hag ar sioulañ hini d'am spered. Pelloc'h evit an ed e oa an ognon a-led renket brav gant ma mamm Mathilde, ma breur ha me, war baper journal melenet. Plusk disec'het ar pennoù ront-se a daole dija c'hwezh soubenn domm ar goañv d'hor fronelloù. Pep koulz a sache gantañ e frond ha livioù an deizioù tremenet ha da zont. Diouzh kostez al lukan e oa renket e kasedoù, avaloù Sant Jermen, lufr o c'hroc'hen. Tik e oa ma mamm Mathilde d'o renkañ, distok an eil aval diouzh egile : skañv e save ar frond anezho. Pelloc'h e oa ar patatez, doujet gant an holl er gêr, o feilh marellet, gante c'hwezh an douar. Dre guzh e c'hoariemp kizellañ ur batatezenn krignet bennak gant hor c'hontilli d'ober sielloù ; kazi pec'hed e oa.

— Petra 'maout o vont d'ober hiriv ? a c'houlennet digant Garkamm, hon amezeg all :

— 'Memes mod 'giz bemdez d'ar poent bloaz-mañ, emezañ en ur c'hoarzhin. Er memes mod eo lusket hon

buhez deomp holl amañ, gant ar memes paz e valeomp, n'eo ket paz ar soudarded, hini baleerien a-dreuz ar c'hantvedoù marteze. Taoler a ra pep eostad ar memes c'hwezh bep bloaz. Merket eo dija an amzer zo o tont, seder an deizioù pa'z eo bet kaer an eostad. Peizant e vi, Gwenole ?

— Hag e vin, a lâren, lorc'h ennon.

— Neuze, ne vo ket dav dit, Gwenole, kaout un eurier stag ouzh da vrec'h, 'benn vi erru en oad da zerc'hel douar, en da galon e vo horolaj ar pemdez. Gwelloc'h-marc'had 'vo dit !

Labourer-douar e vefen 'giz Garkamm, Treñvor ha ma zud. Ne ouien ket anv gwirion Garkamm. Fall dapet e oa bet e-pad un emgann e-kerzh brezel Aljeria. Diwar ar c'hloazadenn-se e oa chomet kamm. Doujus e chomemp dirakañ, gouli e istor, bemdez war-wel d'an holl.

Diouzh an abardaez, a-raok koan, pa santen o sevel ennon anken an noz hep garzh na kleuz, o tont n'oun dare eus pelec'h, ez aen d'an nec'h : nebeut a sklêrijenn a oa eno, tamm-ha-tamm e tistane din. Gwelet dirakon labour va zud a gase da bell enkreiz an dazont pe aon rak ar marv piv 'oar. Medisin e oa ar c'hrignol-se din ha diskan an anken ne vourboulhe ken em divskouarn pa'z aen war draoñ, Mamm Mathilde o hopal warnomp :

— Tomm eo ar soubenn, bugale !

E-kerzh abardaezioù an diskar-amzer e wiske ar prajoù bravigoù melen, delioù pupli brokus o c'hervel ar goañv da zont war e bouezig. Dirak an ti, e korn an hent-karr, e oa daou anezhe. Sarac'h o delioù oa 'vel stirlink

tapadennoù, “keloù glav” a lâre Treñvor. Neuze e plije din mont da c’houderiñ er c’hriñol, glav bras o saflikañ war an doenn, tapadennoù ingal o verañ er c’helornioù heson ha me tamolodet em fallenn kozh. Div pe deir sadornvezh diouzh renk e dilost miz Gwengolo, keloù glav gant an oabl du-glas evel ar chiminaligoù, ez aemp da serriñ koad-tan. War hor c’hont deomp-ni bugale e oa an hanochennoù hag ar c’heuneud da c’hwezhañ an tan, lod hon tud hag un amezeg bennak e oa ar skodoù pounnerañ. Diboullañ ha renkañ ar c’hoad er c’harr-ti a blije deomp, c’hwezh ar ruskenn mouest, ar c’hoad bruket chomet da louediñ, pe ar perchoù derv re hir, nevez-heskennet, gante ur frond bennak par ouzh hini eoul olivez a intre hon diabarzh.

Un haroz e oa va zad, ur gwir tad-mager, gouest d’ober burzhudoù diwar had... ne oa den par dezhañ war an douar, goude oa ruz e zivjod. Gant an hentoù-karr ez aemp gant ar gamionetenn 4L, ma breur ha me azezet en e gichen ; hejet-dihejet ha bihan evel oamp ne welemp netra nemet ar stajerenn plastik dirakomp, warni tammoù dir a bep seurt o storlokat gant ar stroñs. Pa sellempe etrezek an nec’h e spurmantemp un takad oabl glas. Hag e heuzoù bras, re ur ramz. Sellet a raemp ouzh e zremm div roufenn don en-dro d’e fri. Ne veze ket troc’het berr e varv gantañ gwech ebet ha gant se e oa tres un den kreñv ha kalet un tamm warnañ, marteze e plije se deomp. Nadoz an tizh a oa gant ar c’hrenerezh koulz hag ar stur hag hon daoulin noazh. Pa rae glav hor beze plijadur gant an takennoù dour o rizenniñ war ar werenn gostez ; gant hor biz ez aemp da heul ar sarpantoù-dour o

hejañ o c'horf, war-raok, war-dreñv, a-gostez.

— Ha ma'z afemp betek ar penn all deus ar bed ? a huche Lan kreiz-pep-kreiz a-bouez-penn, da Jili da glevet rak didrouz ne oa ket hor “c'hatr-aile” !

— Mont a rafen 'walc'h, kar war an hent mat 'maomp met 'mañ ket hon fijamaioù ganeomp !

— Lâr din memes tra pelec'h emañ an hent da vont betek ar penn all eus ar bed ? emezon hegreidik.

— Tremenet omp hebiou d'ar c'hroashent daou vunut zo, a lâre Jili hep mousc'hoarzhin.

— Ur wech all bennak ! a lâre Lan, disouezhet un tamm.

Rekouret e oan-me avat, da lâret ar wirionez : a-drugarez d'ar pijama chomet er gêr e kavfen en-dro divrec'h kuñv ma mamm ha gouleier ti an amezeien, stered skedus e teñvalijenn an noz ! Chañs 'm eus bet a-drugarez d'ur pijama pe d'ur c'houlouenn bennak war ma hent...

Pa deue ar poent da arat, da freziñ, da rolatañ,\*ha da hadañ a-benn ar fin e save birvilh en tiegezh koulz ha tro-war-dro. Da c'houlou-deiz e kleved traktor Avto Treñvor o fraoñval etrezek parkeier an traoñ. Un traktor eus an URSS e oa, stumm kozh dezhañ hag hir bazh e stur ken e oa farsus da welet. Traktor Zetor ruz Garkamm a anavezen ar soroc'h anezhañ a rae kemend-all er penn all.

— Oc'h ogediñ emañ Treñvor.

— Prestik 'vo hadet gantañ.

O c'hedal e oa an holl pardon bras an nevez-hañv.

Dalc'het 'm eus soñj eus ur sizhunvezh kaer a viz Ebrel, n'ouzon ket e peseurt bloaz e oa. Ur merc'hervezh

emichañs, peogwir oamp er gêr Lan ha me. Va zud a oa lemm ha splann o daoulagad en deiz-se evel mintinvezhioù an nevez-hañv, un tamm glizh enne a gredan. O c'horfoù stign a santen tomm an eil ouzh egile : da boent lein pa zistroas va zad eus ar park nevez-hadet e krogas e divskoaz e wreg gant e zaouarn kreñv. Harp he c'hein ouzh bruched Jili, e c'hoarzhe ken e weled he dent gwenn par da re Jocelyne va mignonez kuzh er skol. Chomet e oant e-giz-se un heurtadig, amzer dezhe gwelet daoulagad o bugale par warne, neuze o doa c'hoarzhed :

— 'Mañ an had o vont da ed, a lâras Jili.

— Evit poent eo deut mare lein ! Ha c'hwi Jili Peñseg, keit 'vo du ho tremm gant ar bouldrenn 'vel hini ur morian, 'vo tamm boued evidoc'h, beg du ac'hanoc'h ! a lâras Mamm Mathilde.

— Ar vorianed n'int ket tud drouk, emezañ e-ser ober ardoù d'hor spontañ.

— Du pe wenn, hon tad oc'h bepred, a lâras Lan, a ouie komz brav.

— Ma teu un tamm gwrez, ne vo ket pell an ed o kellidañ, a lâras Jili o terc'hel gant e gaoz, un torch en e zaouarn.

— Ale ! Bec'h d'ar soubenn domm, ognon ha patatez ar c'hrignol a zo 'barzh.

— Hag ar c'harotez krignet gant al logod 'zo 'barzh ivez ? emezon, heuet.

— Ar staot logod an hini 'ro blaz ! a lâras Jili.

— N'eo ket gwir se, hañ, Mammig ! a lâras Lan.

Divrec'h va zad a oa rous, kignet ha nerzhus, re va mamm a oa gwenn ha dous.

O virviñ e oa ar c'horfoù, ar sperejoù ; an douar ennañ

promesaoù a vage ar spi ennomp koulz bras ha bihan. Skrafignet e oa bet ar vein-sklent ha divrec'h ar gwez gant skourroù an avel dreut met deut e oa poent ar pare evit ar goulioù. Gant gwrez ha glizh-mintin an nevez-hañv e save adarre ar gwad d'ar broñsoù d'ober o c'hresk. Trec'h d'ar goañv e oa bet hon tud, hon amezeien ha ni bugale d'o heul, lorc'h ennomp. Kalz a voged ha nebeut a dan... petra 'verne ! Ar gredenn a oa ennomp, marellet dija hon diabarzh gant livioù an nevez-hañv, dihellet hor c'halon d'ar c'hreisteiz. Ha goude e rae glav druz a-ruilh da ziboullañ mein an hentoù-karr, ha goude en em sile leizhijenn ar goañv 'barzh liñserioù hor gweleoù e ouiemp e oa tro-war-dro deomp ur ouenn tud prest da daliñ hep damant ouzh o foan. Evit piv 'ta e roent kemend-all a vec'h ? Evidomp-ni bugale ? Evito o-unan ?

Pep hini en devez e sekrejoù a zifoup a-wechoù e-giz eus ur godell didoullet. Ur wech ha me bihan d'ar poent-se, em boa klevet muzik kreñv o tont eus ar gegin : tostaet e oan betek toull an nor. Muzik “bras”, klasel, ma 'peus c'hoant a oa gant Mamm Mathilde. Hi a oa eno, gwisket ur sae sklaer flamm ganti, o tañsal en-dro d'an daol hag o labourat war un dro, o c'hoari evel ur plac'h vihan didrubuilh. En he blev kempenn e oa ur spilhenn-alc'hwez vouk, soñj mat 'm eus. Luc'hiñ a rae ; ur steredenn en oabl an noz. Skañv he c'horf, e tarnijehi en-dro d'an daol par d'ul labous deut betek toull an nor da zebrñ bruzunaj. Met petra a c'hoarie ganti ? He daoulagad ne oant ket re ma mamm, met daoulagad bras estonet ha karantezus ur plac'h yaouank n'em boa gwelet

biskoazh hag a anavezen koulskoude. Ne oant ket glas ken, gwer e oant. Frond skañv an hunvreoù didrubuilh a save er gegin. Chomet e oan da sellet, enkrezet ha boemet. Damzigor e oa an nor. Pa welas ma daoulagad paret warni e teñvalaas he re-hi hag e krenas he muzelloù. Goude n'eo ket ken spis an traoù em spered. Steuziet al labous, ar bruzun, ar spilhenn-vlev ne luc'he ken e koantiz blev melen-plouz ma mamm, ar sal-dañs a oa troet en-dro da gegin, he yaouankiz troet da vezh.

— Petra 'rit amañ 'ta, emezi, me 'gave din, me... me 'gave din, emezi, 'oac'h aet gant Lan da zastum mouar ?

— Deut on en-dro, fachet on gant Lan ! Diskaret ha skrapet 'neus ma sailhad diganin.

Hag hi war benn he daoulin da gregiñ em daouarn ha d'o flourañ.

— An dra-se n'eo netra, mabig, an dra-se n'eo netra ! Deut eo poent mer'n-vihan ; 'peus ken 'met mont da gerc'hat Lan hag e vo renket an traoù etrezoc'h. Met sellit mat ouzhin Gwenole ! Un dra 'm eus da c'houll diganeoc'h na rankfen ket ober, emezi. — Kammet oa he beg ha krenañ a rae he muzelloù — Miret ur sekred !

— Peseurt sekred, Mammig ?

— Na lârit da zen, na d'ho preudeur na d'ho tad 'peus gwelet ac'hanon gwisket 'vel hirio ha muzik amañ ganin. Promet' a rit din ?

— 'Blam' petra, Mamm ?

Prometiñ a ris dezhi a gav din gant ma vije roet ma sailhad mouar en-dro din gant Lan.

Ankouaet em eus lâret deoc'h e oa kamm Mamm

Mathilde, nann, pas kamm evel kabiten enez an Teñzor nag e-giz Garkamm ! He faz ne veze ket plaen dalc’hmat ’giz ma vefe bet un disterig berroc’h ur c’har dezhi. Ur doare-bale “fantaisie” kentoc’h. War evezh e veze da chom hep kammañ pa veze hor sell par outi. Atav em eus bet soñjet e stleje an dud kamm o istor da heul o foan, pep hini o klask goût penn-kaoz ar pazioù-ruz-se. Hag e c’houlennemp diganti :

— C’hwï, n’oc’h ket bet gloazet er brezel ?

— O, nann ! N’em eus ket gwelet reuz ar brezel dre chañs. Tapet ’moa ul lamm er skalier mod-kozh a oa er gêr pa oan plac’h yaouank, setu tout. Ne oan ket aet da welet ar medisin, d’ar mare-se ’oa mod-se... Tamm-ha-tamm em boa santet e oa reutaet ma gar, ’michañs ne oa ket aet an traoù mat en o flas, a lâre en ur dreñ kein deomp hag o c’hwezhañ he fri.

Pa oamp degouezhet war hon c’hiz, ma breur, ar skrapper-mouar ha me, difachet dija goude hon troc’had-hent a-dreuz parkoù da vont d’ar gêr, he doa Mamm Mathilde – evel ma raemp anezhi koulz lâret dalc’hmat – gwisket ur sae ordinal hag he zavañjer pemdez. Sinet e voe an emglev kuzh etrezomp da vat nep komz all ebet. Div pe deir gwech em eus bet gwelet anezhi o tañsal, ha me skoachet e-korn ar prenestr, em hunvre pe er vuhez wirion n’ouzon ket ken, ne vern. Sellet a raen outi a-dreuz ar werenn koantoc’h evit biskoazh : ar spilhenn-alc’hwez vouk en he blev kempenn, he sae sklaer flamm, ar memes hini ? n’ouzon ket. Ar muzik kreñv, muzik da zihuniñ an eneoù kousket, da lakaat trubuilh e kalon an diaouled, da lakaat da verañ an daloù war divjod ur paotrig azezet

e traoñ moger ur prenestr. Pell e oa Jili er park o treiñ douar, klevet a raen fraoñv an traktor o vont plaen. Ne voe morse kaoz eus se ganeomp ken. Ur wech bennak diouzh an noz, ha ni ouzh taol o koaniañ, em eus bet gwelet ar spilhenn-alc’hwez en he blev.

Alies ’m eus bet c’hoant da c’houlenn kalz traoù diganti : goulennoù na ouien ket roiñ stumm ebet dezho.

Prometiñ chom hep komz am boa graet, koulskoude e oa bet ar sekred meur a wech war beg ma zeod evit diskouez da Lan paneveken.

Un dra a voen souezhet gantañ un heurtadig warlerc’h. Seul gwech ma veze digarez da glevet muzik Bach pe Brahms er skingomz dre zegouezh, ha ma zad en ti, e strake imor ennañ.

— An dra-se n’eo ken ’met muzik bourc’hizien. Laeret gante ar muzik-pobl, n’o deus graet ’met gwiskañ dilhad-sul da zañsoù pe da donioù o bro, dañsoù hungariat Listz n’int ’met laeroñsi d’ar bobl !

Unan a zaou, pe e save trumm pa oa echu e richenn gantañ, da serriñ e veg d’ar skingomz, pe ez ae Mamm Mathilde d’ober kemend-all a-raok fin kaouad imor he gwaz, he faz deut pounner a-greiz-holl. Boull eo bet din gwelet Jili ken taer ha ken drouk e zaoulagad.

Diwezhatoc’h e teuas an displegadenn, pell warlerc’h...Ha bremañ c’hoazh pa welan ur plac’h ur spilhenn-alc’hwez en he blev e-giz ur barbellig war ur vleunienn e serran ma daoulagad ; troidellat a ra neuze Mamm Mathilde e sal-dañs Kerango.

## 2. *Treñvor hag ar re all*

Hon amezeien dostañ a oa evel tud-kar deomp, anvez' raemp o boazioù. Ar re oa o chom pelloc'h, en tu-hont d'hor parkeier, avat, a oa estrenien deomp ! Spouronet e vezemp-ni bugale gant lod tud "drol" a oa o chom war an dro ; met aze e oant, evel ar re all, o taliñ int ivez ouzh o foan-spered pe o sorc'hennoù. Den ne vije deut d'e spered gervel ar jandarmed pe ar maer pa deue rust pe taer ar vuhez abalamour d'ur barrad fall bennak. En hor mesk e oant, evel ur park war ziribañs en hol lod, graet e veze gante diouzh ma oant, ne oa tra all ebet d'ober. Fañch Rivoal a oa un' anezho, maget du-mañ du-se, o reiñ un taol lañs tu pe du diouzh ma veze e imor. Ne gomze ket koulz lâret, e zaoulagad avat a lâre e peseurt stuz oa an traoù en e spered. A-wechoù oa warne tres sioul ur parkad ed, 'wechoù all oa warne liv ar vogidell er wantrell. Met ar pezh a sponte ac'hanomp bugale oa e zaoulagad lemm, e benn ruz hag e dok troñset pa veze ur barrad avel diroll o troiñ en e benn. Neuze e oa ret goût an tu : labour-korf rust a ranked kaout evitañ da dorriñ d'ar gaouad. En eil ti pe en egile e veze kavet louzoù ar pare, gant skiant-prenet ha pasianted ar beizanted da vedisin.

— Amañ zo koad da faoutañ forzh pegement, Fañch !

— Mat eo din, lazhañ... lazhañ... lazhañ ma imor en deizioù-mañ, keloù ar... ar... arnev 'gav din, a valbouze Fañch, ruziet e zaoulagad.